

IMBOUREC'H

30 Ebrel 1972

Niverenn 28

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Trede bloavezh

Niverenn 28

30 Ebrel 1972

Dibab ur politikerezh.....	p.91
Petra eo an amvevadouriezh?	p.95
Istor an Emsav.....	p.98
Eritrea, un draen e pav al leon etiopat kozh gant Jakez ar Bihan.....	p.99
Ur brezel ankounac'haet : brezel an Tchad.....	p.102
Kemennadennoù.....	p.106
Penaos emañ kont gant hor yezh.....	p.107
Devezhioù-studi SKOL AN EMSAV.....	p.109

Ar pennadoù embannet ebarzh IMBOURC'H gant izili eus E.B.V. ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanat-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier, 1534 25
Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver. Priz an
niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù a zo da gas da Y. ollivier, 7 bd.
A.-Burloud, 35 - Roazhon.

CPPP : 50 015

D I B A B U R P O L I T I K E R E Z H

Darvoudoù ar miz tremenet a laka e kont adarre kudenn stumm obererezh an Emsav. Gouzout a reer ez eus bet harzet un toullad brogarourion vrezhon evit bezañ kaset da benn gwalldaolioù a bep seurt e-pad ur bloavezh bennak, an darn-vuiañ anezho avat a-enep da embregerezhioù ha binvioù-labour (a-ziforc'h e lakaomp ar gwalldaolioù a zo bet sevenet a-enep da savadurioù stadel gall hag a zo bet sinet gant an ARB-FLB.)

War a hañval n'eus ket a zarempred etre an daou rumm gwalldaolioù hon eus meneget. Kirieion ar rouedad en deus oberiet abaoe un toullad mizioù e rannvro Roazhon a seblant bezañ renet o afer en un doare emdarzhak hag eus o ferzh o unan ; en abeg da se ivez marteze n'eo ket bet anat atav ster emsavel pe bolitikel zoken an oberiadennoù a zo bet kaset da benn ganto. A-wechoù ez eztaolent ur savboent trivliadel a eilpouez : distrujidigezh an "tourterioù" - ar "rañverezed" - da skouer, a oa arouezennel hag a enebe moarvat ouzh drastidigezh an amvevad e Breizh hogen seurt drastidigezh n'eo ket liammet dre ret ouzh dalc'hidigezh ar vro gant ur gouarnamant estren. Ken dianat all e oa ster an tagadennoù a-enep da embregerezhioù zo : diaes e oa o lec'hiañ war dachenn an Emsav pe hini ar politikerezh kevredigezhel zoken (perak tagañ an embregerezhioù-se kentoc'h eget re all?) Dre se ivez, hini ebet eus ar gwalldaolioù-mañ n'en deus bet un heklev anat er boblañs nemet hini Sant-Malo en abeg da bersonelezh politikel argarzhed an hini a oa tizhet.

Abarzh dezrannañ ha barn ur seurt obererezh ez eo ret merkañ ez eo dlead pep brogarour ha, pergen, pep emsaver, harpañ e kement stumm zo ar stourmerion vrezhon a zo bet harzet nevez zo, ne vern pezh a soñjomp a-hend-all diwar-benn koulzelezh pe zigoulzelezh o obererezh ; ha kement-se netra nemet dre maz int brogarourion ha m'o deus lakaet o frankiz en arvar gant an dezo da stourm evit ar vro.

Ar skoazell a zo da zegas dezho a zo danvezel, da gentañ, eveljust. Moarvat ez eus dija war an dachenn un aozadur a zo karget

da blediñ gant prizonidi bolitikel hor bro : SKOAZELL VREIZH an hini eo. Bez e c'hell an emsaverion avat en em glevout etrezo ivez evit purchas arc'hant evit ar brizonidi-se eus o ferzh o unan. Hogen n'eo ket eus ur skoazell danvezel o deus ar re-mañ ezhomm hepken ; ret eo strivañ ivez da lakaat ar foran da gompren ster o obererezh, petra bennak ma n'o deus ket gouezet atav anataat ar ster-se bepred ; hag an amkan-mañ, moarvat, a zo an hini pouezusañ.

Goude lavarout kement-se e c'hellomp bremañ ensellout degouezh ar stourmerezh feuls en Emsav dre vras. Ar seurt stourmerezh n'eo ket nevez avat peogwir ez eo bet kroget ken abred ha 1932 gant tarzhidigezh ar "monumant" : un hengoun kozh a-walc'h ez eo eta en istor an Emsav koulz hag en istor Breizh hec'h unan e-lec'h ez eus en em gavet tud bepred a rumm da rumm da stourm gant an armoù evit mennad pe vennad abaoe kantvedoù.

Gwiriañ kement-se n'eo ket anzav evit keloù se ez eo mat hevelep obererezh da n'eus forzh pe vare pe war n'eus forzh pe zigarez. Diboell e vefe moarvat krediñ an dra-se. Klæer eo er c'hontrol e rank pep stourmer brezhon dibab un obererezh hepken en Emsav - an hini a zere outañ - hag en em ouestlañ a-grenn dezhañ ma fell dezhañ ren anezhañ en un doare efedus. Ma ne ra ket emañ war var da chom hepken un "amateur" war bep stumm eus ar stourm brezhon ha da c'hwitañ gant an holl war un dro. Ne c'heller ket labourat en un doare sirius el lu hag en deskadurezh vroadel er memes amzer. Un dibab a zo d'ober eta gant pep hini.

An degouezh-mañ a laka da sevel ivez dre vras kudenn al liesezeladur evit izili an Emsav diazezet war ar yezh. Evidon-me va unan e kredan ez eo furoc'h goulenñ digant an emsaverion en em ouestlañ hepken d'al labour sevenadurel pe sevenadurel-politikel ha dilezel kement stumm a zo a obererezh brezhon. Goude ma kemerfe perzh izili zo eus an Emsav en obererezh aozadurioù gallek zo - brezhon pe get, evel ar c'hweluniadoù er mare-mañ - ne c'hellfent henn ober nemet e sell da vrudañ ha da skignañ keal ar gevredigezh vrezhon ha da grouiñ en o mesk kreizennoù brezhonekaat broadel. Rak netra ne ziskouez a-hend-all e klot labour an aozadurioù-se penn-da-benn gant mennadoù an Emsav e unan. Moarvat, da skouer,

e stourm an Emsav war wel da ziazezañ e Breizh ur gevredigezh kevarzhel hogen ar gevarzhelezh a fell dezhañ ledañ a zle dereout ouzh temz istorel ha broadel Pobl Vreizh. Dre se ne c'hell ket stourm an Emsav en em gemmeskañ penn-da-benn gant nep stourm renkadel a ve hag ez eus tu da ren e framm ar Stad c'hall kerkoulz all ivez. Evel m'hon eus lavaret meur a wech arabat eo d'an Emsav bezañ sachet en ur politikerezh ha n'en deus netra da welout gant Breizh hag an Emsav war un dro.

Gwelomp bremañ kudenn ar stourmerezhe feuls hec'h unan. Notomp da gentañ e chom ar stourmerezhe feuls a zo bet renet betek henn e Breizh ha pergen gant ar rouedad a zo bet dispennet nevez zo e par ar bruderezh hepken. Ne denn ket, d'hor soñj, da zistrujañ dre an nerzh ar renad gall e Breizh evit erlec'hiañ outañ ur renad brezhon hogen hepken da denañ evezh ar Vrezhonek war arveziou zo eus gwaskerezh ar renad gall en hor bro. Ar goulenñ a sav eta eo gouzout ha talus eo ar seurt stourmerezhe e-keñver ar gounid a zo da c'hortoz digantañ. D'ar stourmerion a samm riskloù ar seurt stourmerezhe eta eo barn ha talvezout a ra ar boan sammañ ar riskloù-se e-keñver an amkanioù a fell dezho tizhout.

War a seblant e klot an implij-mañ eus ar feulster gant rez emskiantekaat ar boblañs vrezhon er mare-mañ. Kredapl eo, da skouer, n'he dije ket ar boblañs degemeret un implij eus ar gwallnerzh a vije aet en tu-hont d'ar bevennoù o deus merket dezho atebeion ar seurt obererezh. Hogen notañ a c'hellomp koulskoude emañ ar re-se war un hent arvarus diouzh ma c'hellont bezañ degaset da ren o stourm bepred war un derez uheloc'h, da heul ar gwaskerezh a ziwant bepred diouzh ar gourzhtroerezh. En arbenn a se e rankomp arsellout degouezh ar gourzhtroerezh diouzh ur savboent buhezel o vezañ maz eo hemañ ur stumm a bolitikerezh ha m'emañ ar politikerezh dre vras e par ar vuhezelezh (pezh n'eo ket degemeret gant kalz hiziv).

Daoust eta ma c'heller lavarout en difetis ez eo reizh kement embreg a sikourfe da ziskar en hor bro ur galloud politikel a zo mennet da zistrujañ hor broadelezh hag a zispriz a-hend-all pennañ lazoù hor pobl e ranker evelkent lakaat ar vrogarourion war ziwall ouzh un implij berrboell ha digoulz eus ar feulster. N'eo ket

hepken dre ma c'hellfe ur feulster ha n'eo ket gouest da drec'hiñ pourchas un digarez d'ar mererezh gall da gas da get an Emsav digor e unan hogen ivez dre ma ne dalv ket ar boan kregiñ en armoù keit ha maz eus tu da genderc'hel da stourm dindan al lezenn. N'eo nemet en deiz ma vefe klasket distrujañ an Emsav war-eeun e vefe aotreet ar vrogarourion da zibab a-unvan hent ar feulster. N'omp ket degouezhet er bazenn-se avat. Gwir eo e c'heller degouezhout enni un deiz bennak ha rak-se - an dra-se hon eus merket meur a wech - e komprenomp e sammfe brogarourion zo ar gefridi a wareziñ an Emsav diouzh ret en ur seurt plegenn. Hogen an trevell-se ne zere ket ouzh an Emsaver plaen en deus da stourm en un degouezh ordinal. Hag an dra-se a zo da gounañ da gement hini a c'hellfe bezañ dedennet gant ar romantelouriezh.

Ouzhpennomp ez eus un arvar e darvoudoù a seurt gant ar re a zo o paouez c'hoarvezout : bez e c'hellont bezañ implijet gant ar gleizelourion c'hall evit o bruderezh evel m'o deus klasket arverañ prosez Burgoz daou vloaz zo. Nevez zo eo bet gwelet stourmerion eus "La cause du peuple" oc'h embann "Gwirionez-Breizh" (kelaouennoù kleizelour gall zo evel "Politique hebdo" a embann doareoù a-ratozh evit Breizh h.a.) Moarvat e teu ar gleizelourion da vezañ intret mui pe vui gant tezennoù an Emsav hogen o vezañ ma laka ar re-mañ ar pep pennañ eus o stourm e par ar Stad c'hall ez eus un dañjer bepred a welout an Emsav korvoet gant estrenion ha distroet diouzh e balioù. E kement-se holl e rank an Emsaverion soñjal bepred.

P E T R A E O A N A M V E V A D O U R I E Z H ?
=====

gant Jil EWAN

Un nozvezh souezhus evit lies hini, a gredan, zo bet e KREIZENN SEVENADUREL BREZHON GWENGAMP d'ar 25 C'Hwevrer 1972. Deuet oa di an Ao. MERIEN eus AN ORIENT, rener ar gelaouennig 'NATUR HA BUHEZ' : un abostol mard eus unan hag a oar da vihanañ komz ouzh ar yaouankizoù.

Ouzhpenn 100 den yaouank etre 15 hag 20 vloaz hag un 50 bennak a dud war an oad oa deuet da selaou ha da gemer perzh goude en ur gendael. Un diskuliadenn wirion eo bet evit hon paotred hag hon merc'hed klevout komz diwar-benn estreget marksouriezh ha kleizelouriezh, evel m'int boas peurliesañ, peadra da vezañ heuet en diwezh. Hogen, petra ober, peogwir emañ ar voull bepred gant kealiadurezh an daou vourc'hiz a brientas hag a sevenas, war a lavarer, an dispac'h brasañ biskoazh kaset da benn aba m'eo bed ar bed ?...

Ma ! n'ouzon ket ha kenderc'hel a ray ar voull gant ar varksouriezh, mar bez gwelet degadoù evel MERIEN o vont bep noz eus an eil korn d'egile d'ober abostolerezh ken berzhus. Rak, ken skoet, ken emskiantekaet e vo hepdale ar re yaouank gant kudennoù ken gwirion, ken fetis, ken tost, na petra, ouzh reoù Breizh hag ar re a zo bet displeget dezho e Gwengamp, ma kemmo hep mar buan-kenañ ar mennozioù diwar-benn an armerzh hag ar gevredadelezh, petra bennak ma hañvalont graet evit ober berzh, da vihanañ diouzh klevout an tezennoù a vez o redek hiziv an deiz e pep lec'h. Un diwezh a vez avat da bep sorc'henn. War dachenn ar gealiadurezh c'hlan ha war hini an niderezh pergen e c'hallfe a-walc'h, n'eo ket hepken dalc'hidi ar gevalaouriezh prevez, hogen dalc'hidi ar gevalaouriezh-Stad ivez, eleze ar varksourion, bezañ enket da vat.

Aes pep tra da veizañ : emañ ar vuhez dindan hec'h holl arveziou war var steuziañ diwar c'horre ar bed. 'Primum vivere', a lavare ar Romaned. Ya, kent gouzout penaos seveniñ an eil dispac'h kealiadurel pe egile, gwelout pegeit a chom c'hoazh gant an den d'ober e dreuz war an douar, ha ma ne gaver ket ez eo re ziwelzhat, klask neuze seveniñ ar brasañ dispac'h bevedel a c'hallo an denelezh tennañ lorc'h anezhañ e gwirionez : an dispac'h amvevadouriel. Hemañ a vo ivez, hep mar ebet, an hini tostañ d'an dispac'h buhezel bet kinniget gant ar gristeniezh. Setu dre vras ar gentel hon eus tennet eus nozvezh Wengamp.

Hogen, petra eo an amvevadouriezh ?

An amvevadouriezh zo da gentañ lod eus ar vevoniezh. Un ouezoniezh eo enta o studiañ barregezh ar boud bev da glotañ ouzh ar metoù hag an amva, hag o kinnig al louzoù, dreistholl en un oadvezh pistriet evel hon hini, evit ma c'hallo ar vevedidi (boudoù bevedek) herzel ouzh ar marv. Amvevad a dalv neuze kement ha metoù hag amva war un dro, da lavarout eo kelc'hiadur fizikel-kimiek (metoù) ha kelc'hiadur bevedel (amva), hemañ strishaet d'ar vuhez danvezel nemeti.

Gouveneget em eus uheloc'hik kudenn hon oadvezh pistriet. Splann eo da bep hini ez eo kontammet bremañ an amvevadelezh gant ar greanteladur. Emañ ar greantelaat o kenderc'hel dre ar bed gant e hent, hogen, tostaat a ra termen an argerzh anvet 'oadvezh c'hreantel', hag emañ an denelezh war nes tremen d'un oadvezh nevez, anvet endeo 'oadvezh diangreantel'. Pal an denelezh a vo pareañ MAR GALL, kement droug a vez graet bremañ d'an amvevadelezh. Ar gudenn avat zo gouzout ha gouest e vo gouezoniezh ar gouezoniezhioù anvet e brezhoneg kalvezel 'gouiziadoniezh', da reiñ lusk d'ur Skiant Nevez yac'h ha trec'hus evit pareañ beved an dud war an douar.

O vezañ ma chom divent-spouronus dirak an denelezh ar pik-goulennata, o vezañ ma chom berr hiviziken barregezh-dreistbevañ an den war e damm-pri, o vezañ ma kred d'an amvevadourion e vo diaes d'ar ouezoniezh betek evel (pegen bras bennak ar c'hammedoù a vez oc'h ober abaoe 20 vloaz) bezañ gounit hiviziken en he c'henredadenn gant ar pistriadur hag ar marv bevedel, da vihanañ ma ne sav ket bediz holl gwitibunan en o zu, n'eus nemet un doare da drec'hiñ : frammañ strolladoù-gwaskañ stank-ouzh-stankañ evit ren an emgann diwezhel ouzh an doare Kevredigezh ma vevomp enni, na pa ve kevalaour pe varksour ar renad anezhi, rak heñveltra e vo gant an eil ha gant egile tonkad amvevadel an den.

Raktal e weler e teu an amvevadouriezh, gant lod, da gemer furm ur gealiadurezh nevez. Hogen, oc'h arsellout ervat, n'eus ket da vezañ souezhet. Ha sed amañ perak.

Ne dalv ket ar ger 'amvevadouriezh' da dermenañ ur gelennadurezh o tennañ d'ar bevedegoù hepken, rak neuze ne vefe anezhi nemet bevedouriezh hollek a zo rann eus ar vevoniezh. Dre ma fell dezhi avat dreist pep tra saveteiñ buhez an den en e bezh, ne c'hall seurt kelennadurezh ober berzh ma ne gemer ket sol war holl c'halloudezhioù an den war un dro ha war e youl da gentañ penn. N'eus ket tu enta d'an amvevadouriezh da vezañ ur ouezoniezh hep ken all. Emañ oc'h embann taer e tle pep Skiant bezañ engouestlet hiziv. Hogen, gouzout a ra ivez an amvevadour ne c'halle ket ar ouiziaded bezañ engouestlet, kabestret evel ma oant gant an droukreizhiadoù o deus stignet an holl Stadoù pe dost adal bremañ war dachenn an armerzh hag ar gevredadelezh. Pal ar ouezoniezh zo koulskoude sellout ouzh an amvevadelezh e-keñver an den klok, tennañ ma ra hemañ d'ar 'bevedel' ha d'ar 'buhezel' war un dro, evel ma lavaromp-ni e brezhoneg arnevez, eleze d'an danvez ha d'ar spered kevret. Ne c'haller ket enta dispartiañ metoù hag amva kevret diouzh amdro hag amved kevret, pa reer amvevadouriezh.

Ha petra eo an amdro hag an amved ?

An amdro zo dres an amvevad buhezel-kevredigezhel. Diwar an amdro e vez degaset an den da veizañ ar bed ma vev ennañ, hervez pennaennoù ha kealiadurezhioù diseurt a vez atav o kemmañ. Ar gristenion o deus, da skouer, un doare da welout ar bed pell diouzh hini ar gevalaourion kevredik ha stadelour m'eo ar varksourion, hogen ken pell-all e van o weladurezh ivez diouzh hini ar rummad all : ar gevalaourion digevredik ha hiniadel, anavezet dindan an anvad 'frankkevalaourion'. Ur skouer

hon eus amañ eus amvedoù pep rummad. Pelloc'h e c'haller mont zoken, rak pep tudad, na pa ve broad pe get he deus hec'h amved dezhi. Kaeroc'h : hinidenion a gaver, ha dezho un amved resis ivez. Graet e vez anezho, diwar fae alies, 'dengarourion', istrogelled engouestlet' pe n'eus forzh petra : aesoc'h e vez. Ha koulskoude n'eur ket hep gouzout ned int ket holl tud diskiant...

Ober dave da DALVOUDOU DENEL KLOK a ra neuze an amvevadouriezh, evel ma'z eo bet plaenaet dirazomp gant an Ao. MERIEN, anezhañ ur Brezhon eus ar c'hentañ, hag a c'hallfe aes-kenañ lakaat war droad dre amañ strolladoù spiswel tonket d'ober berzh, mar befent broudet gant ur gelennadurezh dinazel azas. Seurt kelennadurezh avat ne chomo mui pell, a gav din, hep diglorañ. Bez' e tisoc'ho dre ret war ul luskad o stourm ouzh div gevalaouriezh hon oadvezh : diouzh un tu an hini brevez, digevredik, ha, diouzh an eil tu, an hini gevredik, stadelour, kiriek an eil hag eben da bistriadur bevedel ha buhez ar Gevredigezh Kevan. Evit klotañ ouzh finvezelezh an amvevadouriezh e vefe seurt luskad ivez, dre ret, broadelour da skouer e Breizh, ha, war un dro, kevangevreadelour, rak ne c'haller ket meizañ nag empentañ an amvevadouriezh en ur steuenn disheñvel. Ouzhpenn ma ned eo ket kevenebet an disterañ tamm broadelouriezh ha kevangevreadelouriezh, daoust ma kred da lod. E komzoù disheñvel, fin e vefe d'ar riezouriezh pe stadvroadelouriezh bet renet ken garv ouzhimp betekhenn. Hag o vezañ ma'z afe ar rizezelezh war vedelaat, e vefe ken pell hag an deiz diouzh an noz an amved a vefe hon hini neuze, keñveriet gant ar gealiadelezh a rankomp gouzañv hiziv.

Goude kement a reuz, hadet gant reizhiadoù enebet evit ur gwel, hogen o tennañ e gwirionez d'an hevelep pal andenel, evel ma ra ar varksouriezh koulz hag ar frankgevalaouriezh, ez eo un drugar spurmantiñ ur skleurenn salvus war dremmwel hon dazoned kristen, Brezhon ha bedel. Ha krog e vijed en diwezh da doullañ al latar ? Kalz en deus plijet din, da skouer, pennad Alan DURAND, bet embannet war niverenn 24 IMBOURC'H dindan an talbenn 'EMSAV HA STADELOURIEZH'. Gant va gourc'hemenoù c'hwekañ ne lavarint da'm c'heneil nemet un dra : kenveno on ganit, Alan, e pep keñver, ha ne reomp c'hoazh nemet kregiñ gant ur stourm a ranko disoc'hañ war un amvevad hollek yac'h, ur bed nevez, evodet eus luskadoù nevez o devo gouezet enkelc'hiañ ar c'hudennoù gwirion enep da bep kealiadurezh put ha koumoulek, maget hiziv gant ur Stadelouriezh naontekvidik war he zalaroù.

Jil EWAN

G E R I A D U R E Z H

AMVEVAD, g- milieu ambiant ; AMVEVADEL, écologique (ster ergorel) ;
AMVEVADELEZH, domaine écologique, ambiance ; AMVEVADOURIEZH, écologie
(ster kealiadurel ivez) ; KEVREDADELEZH, domaine social ; NIDEREZH, praxis ;
BEVEDEL, vital (matériellement parlant) ; BEVEDEG, b- organisme vivant ;
BEVEDOURIEZH, physiologie ; BUHEZEL, vital (moralement, spirituellement

parlant). DIWEZHEL, définitif - OADVEZH DIANGREANTEL, ère post-industrielle - STROLLAD-GWASKAN, groupe de pression - DIGEVREDIK, privé (par rapport au publico-collectif) - HINIADDEL, individuel (HINIENNEL : personel) ; HFRAKKEVALAOUR ; TUDAD, groupe huamin ethnique en général ; HINIDEN,g, personne humaine, personnage. KEVANGEVREADELOUR, partisan du fédéralisme intégral ; RIEZLOURIEZH, STADVROADELOURIEZH, statonationalisme ; RIEZELEZH, étaticité (RIEZ, puissance souveraine) ; KEALIADELEZH, domaine et atmosphère idéologique. DINAZEL : politikel (en e haelañ) ha n'eo ket TREVOUREL : civil na kennebeut KEVREDENNEL : municipal. KEVREDENN : KUMUN, PARREZ. EVODET : issu.

=====

DARVOUDOU E BREIZH

Emañ o paouez echuiñ e Sant-Brieg ec'hwel ar "Joint français" a badas daou viz. Pezh a zo heverk en ec'hwel-mañ - estreget hirder an ec'hwel e unan - ez eo diorreadur ar spered breizhat e-touez ar c'hweluniadourion e ser an oberiadenn-mañ ha na gavas a-hend-all heklek diseurt ebet e Bro-C'hall e-touez al labourerion. Ar skritell diwezhañ a voe embannet gant atebion an ec'hwel a rae galv da "gev-arzhelezh al labourerion vrezhon". Stolloù zo a-hend-all, stag mui pe vui, ouzh ar "Cause du peuple" , kelaouenn gleizelour eus Paris, a skigne un dastumadenn a oa anvet "Gwirionez Breizh" ("Vérité-Bretagne") e-touez an ec'hwelerion.

E Roazhon end-eeun ez eo bet broudet an Emsaverion hag ar metou a c'hellfed envel "kleizelour-breizhat" e-touez ar studierion gant an harzidigezhioù diwezhañ e rannvro Roazhon. Gouzout a reer ez eo bet dezouget ar brizonidi vrezhon da di-bac'h ar "Santé" e Paris e-lec'h e vezont goulemnataet gant ar barner-enklask (notomp ne respont darn eus ar re-se nemet e brezhoneg, pergen Y. Gourvez hag e vreur).

E Roazhon ivez e tle bezañ graet endro prosez Gweltaz Durand dirak al lez-varn c'halv. E ser se ez eus bet aozet un diskeladeg gant an Emsaverion koulz ha gant ar metou kleizelour breizhat. Moarvat n'eo ket sklaer tre ster an diskeladeg diouzh
(kendalc'h p.101)

A- viskoazh eo bet lakaet en arvar frankiz hag anterinder Etiopia gant stourmoù-diabarzh ha gourdrouzoù-diavaez. Gwall-chalet eo c'hoazh hiziv al levierzh etiopiat gant an arvaroù-se daoust ma seblant bezañ sioul-kenañ eus an diavaez ar rouantelezh kozh ha daoust d'al levezon vras en deus gounezet ar riez er bed a-vremañ gant e bolitikerezh hollafrikat hag a-du gant ar peoc'h.

Aloubet eo bet e mareoù zo an diriegezh etiopiat gant an Turked, an Egiptiz, ar Vreizhveuriz hag an Italianed. En arvar eo bet lakaet ivez anterinder an impalaerezh gwechall hag hiziv c'hoazh gant emsavadegoù niverus ar poblañsoù Danakil ha Somali. Liesdoare-kenañ eo evit gwir ar boblañs e-keñver gouennoù. Ar re Amkara, a orin semitat, zo ar re niver-usañ ha ganto e vez piaouet an atiloù gwellañ ha yezh kefridiel ar riez eo o yezh.

Avielet e voe Etiopia en 9vet kantved pa zeuas ar gristeniezh da vezañ ar gravez-Stad. Er 14vet kantved e tiskoueze impalaerezh kristen Etiopia ur genstagusted vras peurzisheñvel diouzh diveli ha stourmoù dibaouez ar rouantelezhioù muzulmat amezek. E-kreiz ar 16vet kantved e krogas ar ranndirioù muzulmat a oa dindan wazoniezh Etiopia, d'en em sevel, dreist-holl an Adal, annezet gant poblañsoù Danakil ha Somali, bet islamaet.

N'eo ket diaes kompren abegoù an dilaouenidigezh a-vremañ pa anavezer stad warlerc'hiet-kenañ ar riez : emañ 90 % eus ar boblañs o vevañ war ar maez, ganti ur c'horvoder bloaziek keitat eus 60 dollar dre annezad ha gant frammoù kevredigezhel kengladel peuliesañ. Degas a ra ar gounezerezh 75 % eus ar c'horvoder broadel ha dister eo an obererezhioù all. Ouzhpenn-se e kaver un enebadur etre an noblañs kengladel, ganti c'hoazh ur galloud diharz, ha frammoù yaouank ar melestradur, al lu hag ar skol-veur, a c'houlenn groñs un demokratelezhadur gwirion ha muzulioù efedus a-enep d'ar warlerc'hiadur armerzhel ha kevredigezhel.

E-touez an holl gudennoù a gej hiziv ganto al levierzh etiopiat ez eo moarvat kudenn Eritrea an hini chalusañ. Etre 1855 ha 1868 ez astennas gouarnamant an impalaer e veli war ar ranndirioù etiopiat, Eritrea en o zouez, met e 1884-1885 e lakaas o dalc'h ar Saozon war ar ranndir-se. E 1889 e voe aloubet gant Italia ha padout a reas gwarezveli ar vro-se war Eritrea ouzhpenn pemont vloaz. E-pad an eil brezel-bed e tremenas adarre Eritrea e 1941 dindan veli ar Saozon a velestras ar vro e-pad 11 vloaz en ur c'hortoz e vefe kemeret un disentez diwar-benn trevadennoù Italia.

E 1950 e voe anvet gant an A.R.U. (Aozadur ar Riezoù Unanet, a zo e sez e New-York) ur poellgor-enklask, ennañ pemp ezel, na oa hini ebet anezho a-du gant ar bobl eritreat hervez Talbenn Dieubiñ Eritrea. Goude se e kinnigas ur poellgor all eus an A.R.U. ez afe Eritrea da vezañ ezel eus ur c'hevredad etiopiat, ganti hec'h emrenerezh hag he banniel. Dege-meret e voe ar c'hinnig-se gant ar Vodadeg Hollek e miz kerzu 1950 gant 46 mouezh a-enep da 10. Adalek 1952, pa loc'has ar Saozon, e voe miret avat ouzh an Eritriz kemer ur perzh gwirion e politikerezh ha levierzh Eritrea ha diwanañ a reas un emsav-enebiñ. Tamm-ha-tamm ez astennas Etiopia he galloud war Eritrea eus 1955 da 1962 betek kenstagañ Eritrea da vat outi goude mouezhiadenn ar Breujoù eritreat.

War greskiñ ez eas an emskiant vroadel adalek 1955 dreist-holl pa roas e zilez ar maodiern kentañ eritreat hag e ouarnamant evit enebiañ ouzh muzulioù ar gouarnamant-kreiz, en o zouez divoderezh ar strolladoù politikel ha lamedigezh an dilennadegoù ranndirel. E 1960 e voe divodet ar gouarnamant ranndirel eritreat.

En Etiopia (1 221 900 km² he c'horread ha 25 milion annezad he foblañs) ez eo a gravez vuzulmat 35 % eus ar boblañs ha darn eus an Iliz katolik (kopted) 55 % anezhi. Bihan eo niver ar gristenion en Eritrea ha kavout a ra d'ar vuzulmiz n'eus ket tu d'en em glevout ganto. Ne fell ket dezho atizañ ur brezel santel etre kristenion ha muzulmiz hogen tostoc'h-tostañ en deus en em ziskouezet an Talbenn Dieubiñ Eritreat er bloavezhioù diwezhañ ouzh an emsavioù broadelour arabat, ha muzulmiz zo e renerion. Burevioù en deus an Talbenn Dieubiñ Eritreat e Damas, Aden, Bagdad, Beirout, Khartoum ha Mogadiscio. War-dro 2000 den armet a stourm en talbenn ha kontrollet e vez ganto an tachadoù meneziek e diabarzh ar vro. Desket e vez d'an Eritriz lenn ha skrivañ gant an disujidi. Skoazellet e vezont gant an arc'hant kaset dezho gant an Eritriz o chom en estrenvro.

Abegoù armerzhel zo ivez d'an emsavadeg : hervez an disujidi n' en deus graet netra gouarnamant Addis-Abeba evit diorren ar rann-dir-se ha war ziskar ez a hec'h armerzh eta. Forzh penaos ez eo dister a-walc'h pinvidigezhioù Eritrea. N'eus nemet ar magadur-chatal koulz lavarout rak warlerc'hiet-tre eo ar gounezerezh hag isdiorreet eo ar pesketaerezh.

Evit Etiopia, n'eus kudenn ebet : a holl viskoazh ez eo bet Eritrea darn eus ar sevenadur hag an diriegezh etiopiat, nemet da vare an trevadennadur italiat. E miz kerzu 1970 ez eo bet astennet al lezenn-vrezel d'an diriegezh eritreat en he fezh gant gouarnamant Etiopia. War un dro en deus klasket ivez diskoulmañ dre gaer ar gudenn eritreat en ur ginnig un distaoliadeg hollet d'an disujidi ma asantont echuiñ gant o emsav ha dilezel o armoù met n'eus bet betekhenn heklev ebet d'ar c'hinnig-se.

Tamall a ra gouarnamant Etiopia ouzh riezoù all hag emsavioù diavaez lakaat en arvar anterinder diriegezhel an impalaerezh en un enaouiñ obererezhioù dispac'hus en Eritrea. Skoazellet e vez evit gwir an emsav-dieubiñ eritreat gant armoù hag arc'hant digant Libia, Siria, Irak, Suyemen, Liban ha Somalia. Diaes eo ivez an darempredoù gant Soudan rak er riez-se e kav repu an disrannourion. Ennañ e kaver ivez 20 000 repuad a dec'h dirak mougadur al lu etiopiat.

Klask a ra gouarnamant Etiopia derc'hel anterinder diriegezhel ar riez koustet a gousto en ur virout ennañ Eritrea, lec'h ma kaver an drederenn eus greanterezh Etiopia hag an nor nemeti war du ar mor. Merzout a reer en Etiopia, dreist-holl abaoe 1960, un emdroadur bonreizhel a vihana galloud an impalaer hag a greñva war un dro kontroll ar gêrbenn war ar ranndiriù ha war vuhez ar riez. Kreizennet-kenañ eo deuet da vezañ mererezh an aferioù foran.

Kêrbenn Afrika eo ivez en un doare Addis-Abeba, kêrbenn Etiopia, dre ma gaver enni ar sez eus Aozadur an Unvaniezh Afrikat (A.U.A.) hag a-du ganti eo darn vrasañ ar riezoù afrikat evit kondaoniñ an disrannouriezh eritreat evel kement emsav-disrannour en Afrika. Unan eus penn-aennoù diazez an A.U.A. eo doujañs an harzoù a-vremañ rak aon bras en deus pep riez afrikat, evitañ da vezañ arzek peurliesañ, da welout e

ranndiriou o klask en em zisrannañ, o tegas ur bruzhunadur spontus dre ar c'hevandir a-bezh.

Evit ar mare e tiskouez ar gouarnamant etiopat c'hoantaennoù a frankizadur hag a zemokratelezhadur daoust m'eo mennet a-hend-all da virout anterinder ar riez. Mar fell d'ar gouarnamant etiopat lakaat da vat un termen ha d'ar birvilh a gresk e ranndiriou all e tleo gwevnaat e emzalc'h en o c'heñver ha reiñ dezho endro an emrenerezh ret.

JAKEZ AR BIHAN

DARVOUDOU E BREIZH (kendalc'h ar bajenn 98)

maz eo nac'hus savlec'h ar metou kleizelour breizhat o vezañ ma fell dezhañ tagañ ur renad politikel kentoc'h eget difenn an Emsav e unan (a zo war var da vezañ korvoet war wel da amkanioù a zo estren outañ). Hogen seurt darvoud a ziskouez ivez en deus graet an argerzh emskiantekaat brezhon e Breizh ur gammed war-raok.

Notañ a c'heller ivez a-hend-all ez anad e Breizh er mare-mañ ul luskad politikel nevez a zo hini ar c'hreiz kentoc'h eget a-gleiz. Anv a reomp eus STROLLAD AR VRO a zo bet nevez savet hag ivez eus "Jeune Bretagne" en deus kroget d'ober bruderezh e Roazhon, da skouer. Tro hor bo moarvat da zezrannañ obererezh an daou luskad-mañ er nizvezhioù da zont.

EMBANNADURIOU "IMBOURC'H"

Hep dale e teuy er-maez levrennoù kentañ Istor an EMSAV a daolenn strivadennou ar vrogarourion vrezhon abace deroù an naontekvet kantved betek 1918. Tri-c'hant pajennad bennak a yelo d'ober ar gevrenn gentañ-mañ eus Istor an EMSAV. Evit kaout, skrivañ da : Y. Ollivier, 7 bd. Burloud, 35 - Roazhon.

UR BREZEL ANKOUNAC'HAET E TCHAD

gant Jakez ar BIHAN

E kreiz Afrika emañ un diriegezh 1284 000 km² hag ur poblañs 3 500 000 annezad (poblañs Vreizh war un diriegezh 38 gwech ec'honoc'h). C'hoarvezout a ra ar riez-se eus daou rannbarzh disheñvel-krenn : trovanel eo ar su, bleunius ennañ ar gounezerezh (kotoñs, maiz, riz), tra ma n'eo an norz nemet un dezerzh, ennañ nemet un nebeut palmezegi. N'eo ket fraezh an troc'h avat ha tremen a reer eus ar stepenn, e-lec'h ma vez maget chatal, d'ar goadeg vras, dre ur rannbarzh etre.

Fraesoc'h eo avat an troc'h evit pezh a sell ouzh ar poblañs. Kiriek eo an enebadur-se etre an norz hag ar su d'un dispac'hadeg he deus en em astennet tamm-ha-tamm betek goleiñ un darn vras eus gorread ar vro. Meur a abeg zo d'an dispac'hadeg-se : abegoù gouennel pe abegoù politikel hepken. Evit gwir e c'heller lavarout ez eus meur a zispac'hadeg diwanet pep hini diouzh he zu met bremañ n'eus mui nemet ur gudenn vras evit Fort-Lamy, ar gêrbenn, hag he heuliadenn zo bet distabilder ar renad deuet d'ar galloud e 1960 da vare an dieubidigezh.

En em ledet en deus an Islam e norz ar riez war-dro ar c'hwezekvet kantved ha gant Egipt hag ar reter e tiorreas ar sultaned kenwerzh an olifant, plu struskañvaled, ha sklaved. Evit an alouberion-se, galloudusoc'h gant o armoù-tan, ne voe ket diaes lakaat ar poblañsoù morian da blegañ. Pa zegouezhas ar C'hallaoued e kavjont en norzh hag er c'hreiz, impalaerezhioù lies, ec'hon ha galloudus, tra ma chome bruzhunet poblañsoù ar su e meuriadouigoù e dalc'h an norzidi, na baouezent ket d'ober skrapadegoù en o mesk evit kaout sklaved (berzet e voe an "eskemmadeg"-se gant ar C'hallaoued e 1900).

En em ziazezañ a reas an drevadennerion c'hall da vat er vro met teurel a rejont pled dreist-holl ouzh ar su, e-lec'h ma oa stabil ar poblañsoù ha ma oa pinvidigezhioù naturel stankoc'h. Eno e voe stummet ganto ar re a oa o vont da gemer ar galloud da vare an didrevadennerzh. Amsent e chomas poblañsoù an norz e-pad an trevadennadur gall hag enebañ a rejont ouzh kement striv a voe graet evit o lakaat da vezañ divonedus. Morse ne anavezjont an harzoù trevadennel, arzek a-grenn evito, ha kenderc'hel a rejont da redek bro a-hed tiriegezhioù ec'hon a zo bremañ darnoù eus Libia, Nijer ha Tchad. N'eo nemet e 1937 e voe kabestret ar ranndirioù-se. Evito da vezañ poblañsoù turmudus, dezho dija ur sevenadur kozh ha frammet-mat, an Islam, ne gemerjont ket perzh er skolioù krouet gant an Europiz. Nebeut-ha-nebeut e weljont annezidi ar su, bet gwechall o sujidi, o trec'hiñ war o warlerc'hiadur dre ma tegemerent an talvoudoù nevez degaset gant an trevadennel. Kreskiñ a reas o dismegañs evit ar re a grede dibab un hent all estreget hini ar sklavelezh dindano. Met e 1945, pa voe aozet an dilennadegoù kentañ er riez e teuas da vezañ anat dreistelezh eus poblañsoù ar su, a-drugarez d'o frammoù politikel urzhiet gwelloc'h.

Pa zeuas mare an dieubidigezh en em gavas poblañsoù an norz evit ar wech kentañ e dalc'h ar vorianed, a oa ar vegenn anezho an darn vrasañ eus ar frammoù melestradurel, soudardel, politikel ha c'hweluniadel. Dirak eneberezh poblañsoù an norz e heulias gouarnamant ar riez an hevelep hentennoù hag an dre-vadennerion abretoc'h. Ur politikerezh aotrouniezhus a stagas da ren al leviour Tombalbaye : evit dastum an tailhoù ha lakaat al lezennoù da dalvezout re-se e kasas soudarded diakuit, garv ha leun a lorc'h da zerc'hel ar vro.

E touez ar meuriadoù toubou, kantreerion vuzulmat, a sav an niver anezho betek 4 000 den pe war-dro, e tarzhas an em-savadeg kentañ e torosad meneziek ha digenvez an Tibesti. Tchet e oant abaoe pell da enebañ ouzh gouarnamant ar su abalamour d'o feiz muzulmat ha d'o zemz-spered meuriadel.

Hogen en em astennet he deus an dispac'h dre ar riez ha kavout a reer bremañ meur a oaled eneberezh all. Er rann-dir Wadai ivez ez eo diazezet an eneberezh war abegoù kravezel dreis Diaes eo kabestrañ an tachadoù-se en abeg da harzoù Soudan ha Kreizafrika a zo tost tre. Repu a gav an disujidi e tiriegezh Soudan.

N'emañ ket pell eus ar gêrbenn diouzh an deirvet tachenn a drubuilhoù evit ar gouarnamant-kreiz, eviti da vezañ e kreiz an diriegezh annezet gant ar brasniver morian a gontroll ar galloud. Aze e kaver dreist-holl abegoù politikel. E 1963 e voe dizoloet un irienn a-enep d'ar gouarnamant enni maodierned hag amaezhidi a orin muzulmat. Kaletañ e voe neuze galloud al leviour Tombalbaye gant kempenn ar gouarnamant hag ar strollad nemetañ, ar "Parti Progressiste Tchadien" (Strollad araogelour Tchadat). Met na baouezas ket evit se an eneberezh. E mezheven 1968 e voe bac'het a-daol-trumm ur bern c'hweluniadourion ha politikourion abouez gant an tamall bezañ klasket diskar ar gouarnamant gant skoazell broioù estren.

En em astenn a reas neuze an dizurzhiadeg eus an norz da greiz ar riez ha diskouez a ra abaoe holl azonoù un aozadur frammet-mat. Ar Front de Libération Nationale du Tchad (Tal-benn dieubiñ broadel Tchad) pe Frolinat, diazezet d Tripoli e benngarter, zo e bal pennañ echuiñ gant galloud al leviour Tombalbaye, chomet dija kalz re bell e penn ar riez hervezo. Tamallet e vez dezhañ bezañ berzet kement doare a eneberezh hag a vurutellerezha zo, en ur derriñ al lezenn; da vezañ degaset ur melestradur breinet gant ar moumounerezh, ar goubrenerezh hag an didalvoudegezh; da vezañ atizet ar stennadurioù etre ar meuriadoù; hag erfin da vezañ renet bepred ur politikerezh aotrouniezhus en ur greizennañ ar galloud hollet en e zeouarn.

Goude kempennidigezh ar Steuñv diorren e 1968 e tiskouezas e c'hoant ar gouarnamant krouiñ ahelioù-diorren rannvroel. Lavaret eo bet avat e oa bet dibabet ar c'hreizzennoù-diorren-se

en doare da voumounañ meuriadoù zo ha tamall a rejont an eneb-berion d'al leviour brasaat an digempouezioù etre poblañsoù ar riez evit mad e veuriad dezhañ.

Gant skoazell ar C'hallaoued eo bet kaset en-dro ar brezel e norz ar riez adalek miz eost 1969 evit seveniñ an emgleverezhioù kendifenn sinet e 1960 etre Tchad ha Bro-C'hall da vare an dieubidigezh. Ouzhpenn 1 000 soudard gall oa dija o vrezeliñ e norz ar riez da zibenn 1968. Graet e voe kement-se dre laer ha ne reas ar gouarnamant gall bruderezh ebet en-dro da bezh ne oa nemet "un oberiadenn-bolis" (meneget e vez bepred an emsaverion evel forbanned ha preizherion). Diouzh e du ez embannas al leviour Tombalbaye e-pad meur a vizvezh ne oa an emsavadeg nemet ur vojenn ijinat evit gwallvrudañ Tchad en estrenvro. Ne rae nemet en em astenn an emsavadeg vojennel-se avat ha troc'het e voe da vat an darempredoù etre ar gêrbenn ha norz ar riez. Ret e voe d'ar soudarded e'hall astenn o zachenn-vrezeliñ e miz ebrel 1969 da greiz ha da reter ar riez. E miz ebrel 1970 e voe kaset an Trivet Rejimant a droadegiezh-morlu, ennañ kalz Breizhiz, da skoazellañ al Légion Etrangère (rejimant gall ennañ kalz estrenion, torfedourion peurliesañ) hag ar skoazell soudardel roet da renad al leviour Tombalbaye a save dija da ouzhpenn 250 milion FF da zibenn 1970 : armoù, pourvezioù-brezel, kirri hobregonet, h.a....

Ur skoazell vras a zegemer diouzh o zu an emsaverion digant poblañsoù Soudan a hevelep gouenn ganto. Skoazellet e vezont ivez dre guzh gant ar gouerion. Drouklaouen eo ar re-se gant politikerezh ar gouarnamant hag heuliañ a reont galvadennoù ar Frolinat da chom hep daskoriñ an eostoù hag hep paeañ tailhoù. Sevenet e vez gwalldaolioù-sponterezh a-enep da girri ar gouarnamant, d'an dud sellet outo evel kenlabourerion ar renad ha d'an dastumerion-dailhoù.

Dirak emledidigezh an emsavadeg, en deus staget ar gouarnamant gant un ergerzhadeg a unvaniezh vroadel ha krouet en deus " bagadoù ar bobl", strolladoù emzifenn e-touez ar boblañs. E pep kêriadenn e kaver ur bagad, ennañ 60 den dibabet gant kan-naded ar gouarnamant. En o c'hichen e kaver "skipailhoù melestradurel fiñvus" a zo o fal seveniñ oberennoù a dalvoudegezh foran evel dasparzh an dour e-touez ar boblañs. Daskoret en deus ar gouarnamant ar galloud da renerioù henvoazel ar meuriadoù ha glanaet en deus ar melestradur. Diazezet eo an holl-vezivizadurioù-se war gredenn ar gouarnamant n'eus diazez kelennadurezhel ebet d'an emsavadeg, eviti da vezañ hepken an azon eus ezhommegezh ar boblañs.

Anavezot en deus al leviour tchadat dirak an holl "fazioù an amzer dremenet" ha prometet en deus gwellaat e bolitikerezh. Prizonidi politikel zo bet dieubet adalek 1969 evit hoalañ an eneberezh. E-pad m'edo al lu o klask mougañ an emsavadeg gant skoazell ar C'hallaoued e klaske al leviour un diskoulm bolitikel d'an enkadenn. Un arsav-brezel a voe tizhet e 1970 e rann-dir Batha, a oa sañset bezañ dija e peoc'h, ha berzh a reas

dreist-holl politikerezh adunvanidiñ ar gouarnamant e deroù 1971 gant emzaskoridigezh renerion disuj eus ar meuriadoù mubi e kreiz hag e reter ar riez. Asantiñ a rejont da gas dileuridi d'ar P.P.T.. Klask a ra ar gouarnamant bremañ skoulmañ un emglev gant an disujidi toubou en norz. Renerion zo eus ar Frolinat o deus kejet e miz genver gant al leviour tchadat ha divizet distreiñ d'ar riez evit kenlabourat gant ar gouarnamant. Dilennet eo bet Djibrine Kerallah ha Baba Hassane e burev politikel ar strollad tchadat e miz ebrel ha deuet int da vezañ maodierned zoken d'an 23 a viz mae.

Pell eo an emsavadeg a vezañ flastret avat : gwall chalet eo c'hoazh ar gouarnamant gant ranndiriou Guera, Salamat, Wadai ha ranndiriou an norz. Embannet ez eus bet ur c'hemenladur gant ar Frolinat en Aljer e derou mezheven o fugeal "bezañ faezhet lu-margodenn Fort-Lamy" ha "bezañ dalc'het en arvar ar soudarded c'hall galvet war e sikour". Ne seblant ket war-nes plagañ Doktor Abba Siddick, unan eus renerion bennañ an Talbenn-dieubiñ, bet maodiern an deskadurezh tchadat ha sekretour-meur ar P.P.T.: "Kenderc'hel a raimp gant ar stourm betek diskar ar renad a-vremañ..."

D'ar 16 a vezheven o deus ar soudarded c'hall paouezet gant o c'hefridi evel ma oa bet divizet a-raok ha klask a ra bremañ al lu tchadat kontrolliñ an oazizou evit lezel ar gantreerion hep dour ha gwanaat o saviad. Ne seblant ket an emsavadeg warnes echuiñ er bloaz-mañ ha gortozet o deus marteze an disujidi disparti ar C'hallaoued evit skeiñ adarre taolioù bras. Arabat disoñjal e vez skoazellet ar Frolinat gant an diavez, gant Libia ha Soudan dreist-holl, ha gant poblañsoù zo er riez. N'eo ket gwirheñvel e kemerfe ar galloud er riez poblañsoù an norz rak daoust da bep tra e talc'h ar meuriadoù Sara ur genstagusted bras, da nebeutañ abaoe dek vloaz.

Kement-se a ziskouez pegen arzek eo ar riezou hag an harzoù krouet gant an drevadennerion hag int gall pe saoz. Diskouez a ra mat ivez n'eo ket bet kemmet kalz traoù gant an "dieubidigezh" rak chom a ra ar C'hallaoued betek gouzout mistri gwirion ar riez. Kavout a reer el lu tchadat ouzhpenn 600 a "guzulierion" c'hall, ofiserion hag isofiserion, hag ur diazva-brezel pouezus-tre evit ar C'hallaoued zo diazezet bepred e Fort-Lamy, ennañ mil soudard gall ha nijerezhioù niverus. Prest int da "zifenn" diouzh ~~re~~ kement gouarnamant eus pezh a oa an Impalaerezh Gall, (lec'hiet-mat eo Tchad e-keñver kadoniezh e Kreiz ar c'hevandir afrikat). Ret eo gouzout ivez ez eus gweleadoù bras uraniom ha kailhoù all e Tchad, e Nijer hag e riezou-mignon all...

Jakez ar BIHAN

=====
Gerioù : ARZEK/artificiel

K E M E N N A D E N N O U

S K O L - H A Ñ V E T R E K E L T I E K

Ar skol-hañv etrekeltiek a vo aozet gant skourr iwerzhonat ar C'hevre keltiek a vo dalc'het e Dulenn e-pad eil hanter miz Eost 1972 (adal al lun 14vet). Bep beure e vo div pe deir eur kentel iwerzhoneg evit an deraouerion. Ar sammad eus an holl gentelioù-se - etre 24 ha 30 eurvezh - a vo a-walc'h, spi hon eus, evit barrekaat ar studierion da beurzeskiñ elfennoù diazez ar yezh ha da voazañ anezho ouzh dibarderioù-lavar ar yezh iwerzhonek, e seurt doare m'o devezo c'hoant a-c'houdevezh da genderc'hel gant o studi eus ar yezh-se hep kelenner.

Gouestlet e vo an endervezh da brezegennoù ha da gendaelioù e saozneg war arveziou liesseurt ar sevenadur iwerzhonat arnevez : buhez politikel ha stourm evit frankiz ar vroad (perzhioù dibar ar yezh iwerzhonek, lennegezh iwerzhonek, an emsav evit adsavidigezh an iwerzhoneg ; ar stourm evit ar gwirioù keodedel en hanternoz Iwerzhon ; degouezh ar C'henvarc'had h.a.) Spisaet e vo ar poentoù-mañ dre ar munud e-kerzh an tri miz da zont.

Maz eus ezhomm e vo tu d'en em renkañ evit reiñ o c'hoant d'ar re a garfe hepken studiañ an iwerzhoneg o reiñ tro dezho da bleustriñ en endervezh war ar pezh o devo desket da veure. Klevet eo koulskoude e kavo gwell an darn-vuiañ eus ar berzhidi tennañ o mad eus ar vodadeg-mañ evit klask kaout un anaoudegezh spis eus ar saviad a-vremañ en Iwerzhon ha lakaat da glotañ ar studi eus an iwerzhoneg gant breutadegoù (en ur yezha anavezont).

Miret e vo un tamm amzer en abardaez evit divizoù ha rakwelet e vo ergerzhadegoù d'an dibennoù-sizhun. Ma c'houlenner e vo tu da gavout bod e tiegezhioù o komz iwerzhoneg. Ebarzh tiegezhioù prevez ez eo bet jedet e koustfe bod evit an noz ha lein etre 8 lur saoz hanter ha 10 lur (100-130 lur gall) ar sizhun. Gculennet eo digant ar berzhidi talañ arrez a-raok deroù ar rumm-kentelioù-mañ (war-dro 3 lur saoz) evit feurmiñ ar sal ha digoll un tammig ar gelennerion.

Mar plij, skrivit da : Caitlin Maud, f/c C.O. Luain, 86 bothar Northumberland, Ath Cliath 4, kentizh ha ma c'hellot evit reiñ da c'houzout dezhi emac'h e soñj kemer perzh er skol-hañv.

Alan Heusaff, sekretour-meur
ar C'hevre keltiek, 9 Br. Cnoc Sion,
Ath Cliath, 9

KAMP-STUDI BREURIEZH SANT-ERWAN (31 a viz Eost - 3 a viz Gwengolo 1972 e Bulad)

Breuriezh Sant-Erwan a zalc'ho ur c'hamp-studi skol ar seurezed e Bulad (Treger, e-tal Kallag) eus ar yaou 31 a viz Eost da 16 eur betek ar sul 3 a viz Gwengolo da 16 eur. An holl re yaouank ar holl re yaouank, paotred ha merc'hed, barrek da gompren ar yezh ha c'hoant dezho anavezout gwelloc'h o bro hag ar bed a-vremañ, a vo degemeret a galon laouen.

Ur veilhadeg a vo aozet bemnoz goude koan.

Prezegennoù ha kendivizoù a vo graet war an deiz.

Labour dorn a vo ivez, diouzh ma vo ezhomm.

An danvez-studi dibabet er bloaz-mañ a zo : "Ar gristenion ebarzh an Emsav". Studiet e vo petra eo hor buhez a gristen hag a emsaver e Breizh en deiz a hiziv.

E-pad ar c'hamp e vo enoret en un doare ispisial ha gant ar vrasañ doujañs memor hon aluzenner-meur, an Aotrou ar C'halvez aet da anaon e miz C'hwevrer diwezhañ, Doue d'e bardono !

D'ar sul veure e vo lidet un oferenn vrèzhonek e chapel sant Bleaz e Pestivien. Gouestlet e vo ivez da eñvor an Ao. Kalvez.

Priz ar c'hamp : 40 lur evit ar c'hamp a-bezh. Tu a vo da reiñ skoazell d'ar re a vo berr an arc'hant ganto.

Evit kaout diskleriadurioù all skrivañ da : Yann Talbot,
12 rue Cie Roger-Barbé, 22 - LANUON.

=====

P E N A O S E M A Ñ K O N T G A N T H O R Y E Z H ?

Pezh a laka stourmerion zo da fallgaloniñ eo saviad ar yezh hiziv. Ma seller ouzh kiladenn veur ar yezh abaoe 1945 oc'h en em lec'hiañ diouzh ar sellboent kozh e vefed techet a-walc'h da grediñ n'eus ket mui kalz chañsoù da adsevel ar yezh a-benn bremañ. Ar rannvro e-lec'h e komzer brezhoneg n'eo ket mui ur bloc'h start ha fetis, an doare tour na c'helljed aloubiñ biken, m'o doa ar Gelted all avi outañ, hag hon eus anavezet e-pad hor bugaleerezh. Ar c'hreñvlec'h-se n'eo ket mui nemet ur bern dismantrou, en o c'hreiz un nebeut enezennadoù e-lec'h e kendalc'her da herzel ouzh lanv ar galleg, evel er "Gaeltacht" eus Iwerzhon end-eeun. Gant ar wask c'hallek, ar skingomz, ar skinwel, e teu ar galleg tre en holl diegezhioù, o skubañ kuit diwezhañ roudoù hor spered pobl. Petra ober a-enep d'ar morgazh-se a zo oc'h astenn he favioù a bep tu betek en hor c'halonoù ?

Ur seurt dezrannadur, padal, a lez a-gostez elfennoù zo a ya a-du gant uhelvennad ar vrogarourion.

Da gentañ, daoust da bep tra, n'eo ket aet ar brezhoneg da get. Bev eo bepred; kilwerediñ hag enep-argadiñ a ra a-wechoù, da skouer, e rannvro Wened, an hini a oa ar muiañ tizhet war a greded, gant luskad an oferennoù brezhonek.

Sellout a c'hellfed, eveljust, ouzh an emgann-mañ evel emgann diwezhañ un arme drec'het. Da nebeutañ ma kendalc'hfed da boellata evel ma oad boazet d'ober 50 vloaz zo.

E gwirionez, hogozik an holl re a vez o te zrannañ saviad ar yezh er mare-mañ :

1) a loc'h diouzh ur savboent faoz ;

2) ne zalc'hont kont ebet eus eus araokadennoù

kalvezerezhioù zo ha pergen hini ar gelennouriezh ; emomp e 1972.

Ma chom Breizh bac'het er c'hwec'hkogn evel en ur gaoued ha ma soñjer e ranko Breizh chom serret ennañ da viken ez eo sklaer n'o deus ket perzhidi an emstrivadenn etre ar brezhoneg chañsoù kevatal

hag ar galleg

eveljust. Hogen barrennoù ar gaoued c'hwec'hkognek a zo merglet mat a-benn bremañ. Ur Stad c'hall mennet da vezañ emvastel, digenvezet, troc'het diouzh ar peurrest eus ar bed a ya a-enep da red an istor. Soñjal a c'heller er c'hontrol ez eo ar c'hlouedoù savet gant ar Stad-se endro dezhi prest da gouezhañ en o foull. E peseurt egor en em gavo Breizh neuze ? Egor ar meurvor atlantel, a soñj deomp (1). Ar brezhoneg d'ar mare-se ne vo ket tal-ouzh-tal ouzh ar galleg, ouzh ar saozneg kerkoulz all ivez, ne lavaromp ket, ha moarvat gant ar yezh-se eo e ranko ivez en em renkañ ; ar yezh-se avat n'eo ket dañjerus na gourdrouzus evit hor yezh er mare-mañ tamm ebet.

A-hend-all, maz eo gwir he deus ur Stad hollrenat pe hanter-hollrenat en he c'herz binvioù klokoc'h hag efodusoc'h a galz eget re an Impalaer roman Neron, lakaomp, evit distrujañ ur vroad pe ur yezh bihanniverel pe n'eus forzh peseurt stroll bihanniverel ez eo gwir ivez kerkoulz all o deus ar yezhoù, ar broadoù hag ar strolloù-se en o c'herz ivez galloudezhioù divent evit diwall buhez o stuziadur hag o yezh, ha zoken evit dassorc'hiñ anezho. Gwiriañ a c'hellomp an devoud-se e degouezh an hebraeg en Israel.

Gwechall devoa ar yezhoù un diavaezadur dre gomz hepken. Stag e oa o zonkadur ouzh hini ar gomzerion anezho. Pa oa bet serret diweuz ar c'homzer diwezhañ anezho ez aent da get da viken : mervel a raent gant ar vouezh diwezhañ a zistage anezho. Hogen hiziv ez omp trec'h d'an amzer. Dreistvevañ a ra hor yezhoù e pajennoù hol levrioù, en hor pladennoù, en hor bandennoù gwarellek. Luc'hskeudenniñ a reomp ar sonioù hag emañ en hon dalc'h kalvezerezhioù-keleñn hor barreka da zeskiñ ar yezhoù en ur prantad berr tre a amzer (ar remzi kent ne c'hellent nemet hufvreal diwar-benn kement-se). Hiziv e vefemp gouest da virout ur yezh e-pad miliadoù a vloavezhioù gant hec'h holl livioù hag en hec'h holl freskter, frond ar vuhez, en hec'h holl splannder en ur bed da zont. En em c'houlenn a c'heller d'ar mare-se perak al lazherion yezhoù a gemer kement a boan oc'h heskinañ hag o tismegañsiñ komzerion ur yezh, o vougañ o ijin hag o ampartiz - ho pezet soñj eus ar "Simbol" - peogwir o zorfed ne servijo da netra.

Emañ hor peadra eta dreist da ziraez an estren, er-maez eus an amzer ha dre se prest da gemer endro e frankiz ha da zassorc'hiñ.

Gallus eo eta da bep mare dassorc'hiñ ar brezhoneg goude ma rankfe mont da get e-pad ur mare ; bez ez eo an dassorc'hidigezh-se diouzh hor youl hag an tuioù implijet, diouzh dassorc'hidigezh ar Spered Brezhon e unan.

Emañ en hor c'herz hiziv an deiz ar binvioù kalvezel da adober eus hor yezh benveg-eztaoliñ ar vroad en he fezh e korf daou rummad, ha kement-se a drugarez da labour didorr hor yezhoniourion hag hol lennegourion koulz hag hor gouizieion. Ken hir eo buhez ur vroad, ken hir ma n'emañ ket diouzh an darvoudoù pemdeziek betek ur poent zo.

Abaoe pegeit a amzer hon eus klevet e oa erru chañs diwezhañ Breizh ! Ar chañs diwezhañ ? Pet gwech hon eus klevet : ugent vloaz re ziwezhat e tegouezhit ! Ha padal, ar vuhez a zo aet war-raok daoust da se.

Daoust ha tizhet hon eus don an islonk ? Hama ! Emañ start mat dindan hon treid ; ned aimp ket izeloc'h. Mat tre e c'hellomp dibradañ diouzh don an islonk. Ur wech evit mat dilezomp ar soñj ez eo an emgann evit ar vro ur "redadenn diouzh an eurier", ur soñj ha ha na c'hell nemet lakaat ar stourmerion da goll kalon pe da glask en un dispac'herezh berrboell un diskoulm d' o c'hudennoù. Klaskomp

eta bezañ seder ha labouromp a-lazh-korf evit ar Vreizh-se a grouomp bemdez, en ur boellata evel tud eus dibenn an XXvet kantved ha n'eo ket evel Brezhoned eus ren ar maodiern gall Combes.

N'eo ket dav deomp bezañ chalet rak an noz a zo o serriñ n'eo ket hini ar Gelted hogen hini hon eneberion.

KERVORC'H

=====

DEVEZHIOU - STUDI PASK SKOL AN EMSAV

Tri rumm devezhioù-studi a zo bet dalc'het da geñver ehanoù Pask ; daou e-pad hanterenn gentañ ar sizhun goude Pask, e Pant 'n Abad hag e Plouared, hag unan all, an trede, e Kerhan (Penteur) e-pad eil hanterenn ar sizhun-se.

Pleustret stank eo bet an daou rumm devezhioù-studi kentañ peogwir ez eus bet 30 studier bennak o kemer perzh e marevezh Pont 'n Abad, ha 60 bennak e Plouared (en o zouez un Amerikan hag ur Japanad). E Kerhan, evit abegoù n'eus ket bet tro da sklaeraat n'eus deuet nemet un dousennad a studierion. Frouezhus eo bet al labour eno avat evel er marevezhioù all.

Deraouerion a oa eus an darn-vuiañ eus perzhidi an devezhioù-studi a oa bet aonet dres evit reiñ tu dezho da bleustriñ war an anaoudegezhioù o devoa dastumet abaoe deroù ar bloaz-skol.

Kounañ a reomp e vo dalc'het devezhioù-studi an hañv S.A.E. e Lezvenen e-pad hanterenn gentañ Miz Eost. Ar re o defe c'hoant dont d'an devezhioù-studi-mañ a zo pedet da gas o anv da :
SKOL AN EMSAV, 30 place des Lices, 35 - ROAZHON.

=====

DA ZIFAZIAN, p. 99 : FRANKKEVALAOURIEZH : capitalisme libéral.

Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015

Ar mercur: Y. Ollivier